

AR GOULOU Gwenn



Kazetenn *Breizh Vrezhon* niv. 21 Meurzh - Ebrel 2021 Priz : 3€

Dilennadegoù prezidantel e Bro-C'hall

Disul 10 a viz Ebrel, evit an dro gantañ, ha Disul 24 eus ar miz-mañ evit an eil tro, e oa bet galvet 48 milion a geodedourien c'hall da votiñ evit prezidant ar republik c'hall, a ren war hor bro. Kabaliñ an danvez-prezidanted a bade abaoe un nebeut mizioù, pa oa ar meziennou bras oc'h embann hogos bemdez sontadegoù nevez hag o doa diskouezet ar prezidant kozh Emmanuel Macron er renk kentañ bepred, etre 25% ha 30% eus ar c'hoantoù da votiñ etouez poblañs ar Frañs a-du gantañ, a-hervez, met gwir eo e oa bet diaes da bep hini krediñ er sontadegoù. Ha gant gwir abeg, rak penaos krediñ e vije bet kement a dud o c'hoantaat pemp bloavezh muioc'h gant an hevelep den, pa oa bet tabutet ha burutellet kement, gant tud eus a bep tu politikel ! Displijet en deus Emmanuel Macron d'an darn vrasañ eus ar boblañs, hag ali e oa pep hini evit henn lavarout a vouezh uhel. Hep souezhañ hor boa gwelet Jean-Luc Mélenchon war ar renk ivez, en anv e strollad *La France Insoumise*, koulz ha Marine Le Pen en anv ar *Rassemblement National*, int o-daou da vezañ eneberien d'an tuiou kleiz ha dehou hengounel. Ar souezhadenn a oa bet, tro-dro mizioù Gwengolo hag Here tremenet p'en doa embannet ar c'hazetenner ha skrivagner Eric Zemmour e felle dezhañ bezañ

prezidant. Ha setu eñ aet da gabaliñ evel ar re all, ha d'ober berzh ! Berzh er meziennou atav. Pignet en doa uhel a-walc'h er sontadegoù ivez, goude ma n'en deus bet biskoazh a garg er politikerezh : na maer, na kannad, na senedour na netra. Brudet e oa hepken dre e vennozhioù politikel, pa oa bet buruteller war ur chadenn keleier gall anvet *Cnews* e-pad pell. Kinnig a rae bezañ muioc'h a zehou eget Marine Le Pen, ha dedennet en deus un toullad mat a dud en e strollad nevez anvet *Reconquête*. E vennozh brasañ : talañ ouzh an enbroerezh ha na chom da dermal evit kas kuit estrenien zo.

Disoc'hoù ar c'habalerezhioù-se a oa deuet war-wel er skinwel



Disul 10 da 8^e rik d'an abardaez : 28,1% gant Macron ha 23,3% gant Le Pen. Int o-daou, evel e 2017, da dremen en eil tro. En trede plas hor boa gwelet erruout Mélenchon, o pignat betek 21% memestra, biskoazh n'en doa graet kement, ha Zemmour er pevare plas gant 7% eus ar mouezhioù hepken, pell a-dreñv an trede. Un hanter-souezhadenn evit kalz a dud eo bet ; rak abaoe mizioù e lavared hag e kleved e vije bet an hevelep re o tremen en eil tro, met en un tu all e oa bet tabutet kalz Macron hag e bempbloaziad.

Emmanuel Macron adarre

Div sizhunvezh hag un tabut skinwel diwezhatoc'h a oa bet skignet dimerc'her 20 Ebrel, e voe anavezet an disoc'h hollek a-benn an diwezh, disul 24 Ebrel da 8 eur d'an abardaez : Emmanuel Macron addilennet da brezidant evit pemp bloavezh ouzhpenn. Addilennet eo bet eta gant 58,54% eus ar mouezhioù, un trec'h bras a-walc'h war an tuad broadelour gall heñchet gant Marine Le Pen, a zastum 41,46% eus ar mouezhioù. Gounezet he deus renerez ar *Rassemblement National* 6,5 poent muioc'h eget pemp bloavezh a zo pa zastumas 35 % eus ar mouezhioù. Pa soñjer n'eo bet prezidant dilennet ebet gouest da vezañ addilennet abaoe ugent vloaz, abaoe Jacques Chirac e 2002, hag a oa bet adkaset d'ar galloud evit talañ ouzh Jean-Marie Le Pen a oa erruet en eil tro gant 17% eus ar mouezhioù. Evel-just neuze hon eus klevet un darn vihan eus an dud o tamall an dilennadeg, o lavarout e vije bet trucherezh pe trafikerezh e konterezh ar bilhedoù-votiñ, un tammig doare Donald Trump ha Joe Biden e 2020 en S.U.A., hogen ne yimp ket da lavarout kement all amañ e mod ebet. Ar bobl vreton hag ar bobl c'hall o deus votet ha mat pell zo.

Vot ar Vretoned en dilennadeg prezidantel

Da c'hortoz, ret-mat eo anzav ez eus bet votet gant an darn vuiañ eus ar Vretoned, pe kentoc'h gant an darn vuiañ eus an dud a vev e Breizh, a-du gant Macron. Tost da 60% eus annezidi hor bro o deus votet a-du gantañ, ha muioc'h c'hoazh er c'hêrioù bras hag en o zrowardrioù, evel e Brest, Roazhon, Sant-Brieg, Gwened, Kemper ha Naoned. Tud ar c'hêrioù bras a vot muioc'h evit mennozhioù Macron hag ur bed muioc'h digor, a-du gant ar sevenadur bedelour a c'hellfemp lavarout ; tud ar maezioù, er c'hontroll, o deus votet kentoc'h a-du gant Marine Le Pen, ha dreist-holl re kreiz Breizh, a-du gant mennozhioù broadelour eta.

Aet da get eo ar strolladoù politikel a-wechall, ar *Parti Socialiste* ha *Les Républicains*, tu-kleiz ha tu-dehoù gall, hag en o lec'h e weler daou vloc'h enebet : hini ar vedelourien hag hini ar vroadelourien o talañ outañ. Ar Vretoned, int, a hañval-mat bezañ dibabet kentoc'h kamp an tu-gounid, hini an digoradur ouzh ar bed ha spered an araokadur.

Macron adarre, un doare da sikour mennozh an emrenerezh e Breizh ?

Ar Vretoned o deus kemeret perzh er voterezh, niverus-mat, met ken niverus all emañ ar re enebet ouzh ar prezidant. Hag-eñ ne c'hellfe ket addilennadenn ar prezidant bountañ un darn anezho war-du mennozh an emrenerezh pe an dizalc'herezh evit Breizh ? Soñjal e-se n'eo ket droch, dreist-holl pa weler politikerien dilennet Korsika, un rannvro c'hall, o tifenn ar mennozhioù-se. D'an 8 Ebrel tremenet, pe daou zevezh a-raok tro gentañ an dilennadegoù prezidantel gall, e oa bet votet, gant hogos an holl dilennidi eus Kuzul Rannvro Breizh, a-du gant ur raktres o kinnig muioc'h a emrenerezh evit rannvro Breizh. Kement-se a oa intrudu Aziliz Gouez hag he strollad dilennidi eus « Breizh a-gleiz », ha tud ar *Rassemblement National* hepken, bezant e Roazhon, o doa nac'het evel-just. Souezhus ha dic'hortoz a-walc'h eo merzout dilennidi, ha n'int ket ezel e-barzh strolladoù breton, hag a sav o mouezh a-du gant an emrenerezh memestra e Breizh. Evel ma vefe ur mennozh poblek-tre ha naturel. Ret eo deomp gortoz ha gwelout petra a c'hoarvezo ervat goude ar voterezh-se, ar pezh a raio prezidant ar rannvro, Loïg Chesnais-Girard, met un derou mat ha deuet mat e c'hell bezañ evit kas Breizh war-raok.

Tepod Mab Kerlevenez

Brezel Ukraina delanker an trede brezel-bed ?

Kerkent eo bet delanket¹ aloubidigezh Ukraina gant arme Rusia hon eus gallet lenn er c'helaouennoù ha klevout er skinwel hag er skingomz ar frazenn-mañ : “*Bez' ez eo ar brezel kentañ en Europa abaoe 1945*”. Diwir e oa rak

¹ Delanket : *déclanché*.

ankounac'haet e oa ganto brezel Kosovo a-enep Serbia, bet delanket e 1999 gant an AFNA², war-lerc'h an tebet lazhadeg 45 kosovar albanat er gêriadenn anvet Račak. Da c'houde e voe lakaet anat e oa ur savadenn, hogen en abeg d'ar

² AFNA : *Aozadur Feur-emglev Norzh-Atlantel, OTAN e galleg, NATO e saozneg.*

gevier-se e voe bombezet Belgrad kêrbenn Serbia e-pad 78 devezh evit ober dezhi kodianañ. Distaget e voe Kosovo diouzh Serbia ha roet d'an Albaniz kosovar ha muslimat hag an darn vrasañ eus ar Serbiz o tec'hout kuit hag an AFNA o staliañ un diazezec'h bras e kreisteiz Kosovo, ar C'hamp Bondsteel, diouzh anv un haroz eus brezel Viet-Nam, tost ouzh ar gêr Urosevac (andon : Wikipedia).

Abegoù ar c'henniñv

En Ukraina, d'ar c'hentañ sell e welomp ivez an hevelep AFNA empleget e delankidigezh ar brezel en Ukraina, hogen ar wech-mañ e ra ar brezel dre c'halloudegadur³ : an Ukrainiz o pourchas ar c'hig brezel hag an AFNA ar goustreuderezh⁴, a-drugarez da Zelenski o merc'hodenn. Ne vez ket meneget kalz atebegezh an AFNA e delankidigezh ar brezel gant ar meziennoù europat, bez' o deus ar c'habluz peurvat, Vladimir Poutin, n'eus nemet skeiñ warnañ. Koulskoude, n'eo ket disi an AFNA. Da vare kouezhadenn an URSS e 1991 ha ma voe adunvanet Alamagn war-lerc'h, e voe gwarantet da Gorbachev ne vije ket astennet an AFNA war-zu ar Reter, en tu all da Reteralamagn. Amplegad Moskov e oa da asant adunvanidigezh an div Alamagn. Gouzout a reomp n'eo ket bet dalc'het d'e c'her gant an AFNA, aet eo tost an holl vroioù bet komunour dindan yev an URSS, gant an Aozadur Atlantel, ha gant Ukraina e felle dezhañ krignat un darn eus an ez-URSS, re e oa evit Rusia. Aes e oa dizarbenn ar c'henniñv⁵, n'en doa Volodymyr Zelensky, prezidant Ukraina, disklêriañ ne c'houlenne mui mont e-barzh an AFNA, hogen ne oa ket, hep arvar ebet, ar pezh a c'hoantae e c'hougemennerion⁶.

Un abeg all a zo evel-just kudenn an Donbass, daou oblast e Reter ar vro, hini Donetsk hag hini Lougansk, o deus goulennet o emrenerezh war-lerc'h disentez parlamant ukrainat e 2014 da lemel d'ar yezh rusiek e stad a yezh kefridiel en Ukraina. En daou oblast-mañ e vez komzet rusianeg gant 90 % eus ar boblañs. Nac'het eo bet dezho o emrenerezh gant gouarnamant-kreiz Kiev ha kaset eo bet an arme evit ober dezho kodianañ, met tud an Donbass n'o deus ket

pleget hag abaoe ez eo ar brezel digor etre an daou du ha bombezet eo ar boblañs gant kanolierzh pounner an arme ukrainat ; lazhet eo bet 14.000 den abaoe 2014 en Donbass. Komz a reer kalz er meziennoù eus miliadoù a vaouezed gant bugale o klask repu e Polonia hag en Hungaria, hogen ne vez ket komzet eus tud an Donbass o klask repu e Rusia o tec'hout dindan bombezadegoù an arme ukrainat, 60.000 diouto o doa graet ar c'hammed-se en deizioù araok aloubadeg ar Rusianed. Lennet em eus se dindan bluenn ur c'helaouenner en em c'houlenne ha ne oa ket se en dije hastet disentez Vladimir Poutin da aloubiñ Ukraina.

Ar wirionez reuzied kentañ ar brezelioù

Siklezon Enez ar Sarpanted : Ne vez ket gounezet ur brezel hep ober moederezh⁷, diouzh an daou du evel-just, hag en o mesk ez eus a-wechoù ur bern siklezonoù. Siklezon *Enez ar Sarpanted* war ar Mor Du a voe unan eus ar re gentañ. Bez' e oa trizek gward-harzoù ukrainat war an enez-mañ ha gant Kiev e voe kemennet o doa difennet o enez gant kalon, betek ar marv, o teurel zoken ouzh ar Rusianed komzoù o trevezañ re ar Jeneral Patton ouzh an Alamaned e-pad emgann an Ardennoù e 1944, hogen, holl e oant bet lazhet. Diskouezet e oant bet evel harozed, ur skouer evit an holl Ukrainiz da zifenn o bro kousto pe gousto. Siwazh ne oa ket gwir, en em zaskoret d'ar Rusianed o doa an trizek gward.

Lazhadeg Kramatorsk : C'hoarvezet eo bet e Kramatorsk en oblast an Donetsk, d'an 8 a viz Ebrel 2022, un emfuc'hell⁸ tennet war an ti-hent-houarn en deus devoudet marv daou-ugent den bennak ha gloazet ur c'hant bennak all, an holl trevourion⁹. Kerkent eo bet tamallet ar Rusianed da vezañ kiriek eus al lazhadeg-se, hogen ez eo bet dizoloet buan e oa un emfuc'hell "*Tochka U*" a oa bet tennet ha ne oa mui arveret en arme rusian abaoe tri bloaz, amsavet gant unan all anvet "*Iskander*", al luc'hskeudennoù eus dismantrou an emfuc'hell tennet dirak an ti-hent-houarn gant an dud en prou a-walc'h hag an durc'hadur he doa heuliet an emfuc'hell a zeue eus ul lec'h m'edo an arme ukrainat. Ouzhpenn-se ne oa tamm deurus ebet

³ Dre c'halloudegadur : *par procuration*.

⁴ Goustreuderezh : *la logistique*.

⁵ Dizarbenn ar c'henniñv : *désamorcer le conflit*.

⁶ Gougemenner : *commanditaire*.

⁷ Moederezh : *propagande*.

⁸ Emfuc'hell : *un missile*.

⁹ Trevour : *civil*.

evit ar Rusianed herzel ouzh an drevourion kuitaat ar gêr, e-gin-kaer e oa deurus evito o zec'hadeg, peogwir e vez rebechet ouzh an arme ukrainat arverañ ar boblañs trevourel evel skoed denel, o teurel o tennoù adalek karterioù poblet stank, ar pezh a laka luziet ar rebek¹⁰ evit chom hep lazhañ trevourion. Ar pezh-mañ n'en deus ket miret ouzh Joe Biden ober eus Vladimir Poutin un torfedour brezel ha begozhiñ anezhañ eus al lez-varn reizh etrevroadel.

Lazhadeg Boutcha : ur gêr eus bannlev Kiev, ar gêrbenn, eo Boutcha, dalc'het gant ar Rusianed e-pad ur miz. War-lerc'h disoc'hoù ar c'hendivizoù etre Ukrainiz ha Rusianed e Turkia hag a hañvale emdreiñ war an tu mat e voe adaozet stignadur ar bagadoù rusian en-dro da Kiev ha diouzh Boutcha e yeas kuit ar soudarded rusian en urzh d'an 30 a viz Meurzh. Kerkent e voe graet ur video ma weljod ennañ Anatoly Fedoruk, maer Boutcha, mousc'hoarzh war e zremm, oc'h en em veuliñ eus dieubidigezh e gêr gant an arme ukrainat (un dra diwir koulskoude), hogen ne gomz ket eus lazhadeg kantadoù a drevourion, laouen eo evit e gêr ! D'ar 3 a viz Ebrel e voe daskemmet krenn ar c'heloù : kavet e oa bet 300 trevour lazhet gant ar soudarded rusian hag e voe diskouezhet o c'helanoù a-hed ur straed. Diouzhtu e voe komzet eus torfedoù brezel a-berzh ar Rusianed, kehuz¹¹ a voe distaolet ganto, ha d'ar 4 Ebrel o deus goulennet e vefe galvet Kuzul Surentez an ABU evit sklaeraat an traoù war darvoudoù Boutcha : nac'het e voe div wech gant Breizh-Veur, perak ? Traoù divalav a vije bet diguzhet ? Koulskoude al liñvadenn keleier ha diskleriadennoù kefridiel Kiev a zo e dislavar krenn gant film Nerzhioù Arbennik ar Gward Broadel Ukrainat, ar re gentañ o vont e-barzh Boutcha. Kelanoù ebet n'eo bet kavet ganto war hentoù ar vourc'hadenn, lakaet er-maez ur c'horf gourvezet ouzh difourk Gostomel. Netra n'eo bet lavaret d'ar warded broadel gant tud ar gêr a-zivoud fuzuilhadennoù pe dialoù a-berzh ar soudarded rusian. Gwelet eo bet 1,3 milion gwech ar film-se war ar genrouedad. Skrivet eo bet meur a bennadoù war an darvoud euzhus-mañ gant ur bern kelaouennerion evel-just, met lod, spisweloc'h eget ar re all, o deus gwelet traoù a oa en dislavar gant ar wirionez gefridiel :

¹⁰ Rebek : *riposte*.

¹¹ Kehuz : *accusation*.

ne veze ket diskouezet dremmoù an dud lazhet, ne veze ket gwelet gwad kaouedet war ar c'horfoù, evit tud lazhet abaoe pevar devezh d'an nebeutañ ne oa ket reut ar c'helanoù. E-pad ar pevar devezh eo bet difennet d'ar boblañs dont da welout er straed ma oa bet dizoloet an tebet kelanoù. Bez' e lez an holl arverkoù-mañ plavañ an arvar war gwirionder tezenn gefridiel Kiev. Kement-mañ a vije bet sklaeraet gant ur c'hengor enklask etrevroadel, hogen ne gredan ket emeur o kemer an hent-se. Ursula von der Leyen, prezidantez ar C'hengor Europat, he deus lavaret he harpfe enklask Prokolor meur Ukraina, n'eo ket an doare gwellañ evit ober diflukañ ar wirionez pa 'z eo an hini a ren an enklask diouzh tu unan an daou brosezter.

Petra a zo a-dreñv brezel Ukraina ?

Tu 'zo d'en em c'houlenn ha ne vefe ket ar c'henniñv-mañ ul lankad¹² el luskad meur a zle hor c'has, en desped deomp, d'ur gouarnamant-bed, mennet gant ar vedelourion. War-lerc'h kouezhadenn an URSS e 1991 da heul kouezhadenn moger Berlin, e voe meizet se gant S.U.A. evel o zrec'h dezho ha mezhekaet e voe ar Rusianed seul vui ma voe an dizurzh bras o ren en armerzh Rusia gant gronnveliourion¹³ o lakaat o c'hrabanoù war bennadoù a-bezh eus armerzh Rusia bet soviedel, evit prizioù dister, gant ur gouarnamant gwan, dinerzhet d'ar mare-se, hini Yeltsin. Bez' e welas an vedelourion amerikan e oa deuet poent da adaozañ ar bed hervez o mennozhioù, hogen eo deuet Poutin, evel Zorro gant e varc'h hag e dog bras... da lakaat an urzh e Rusia, o lakaat en toullbac'h lod eus ar c'hronnveliourion evit ober dezho daskoriñ ar pezh o doa skrapet enep al lezenn, ar pezh a zisplijas da gellidourion vras all, ma oant e darempred ganto, en Amerika. Ouzhpenn se ez eo enebet Poutin ouzh al lezennoù kevredigezhel oc'h herouezañ¹⁴ an heñvelrevouriezh, an enbroerezh a-yoc'h o tont eus Afrika, ar wokelezh, an holl draoù-se kaset war-raok gant bedelourion *Urzh Nevez ar Bed*, evit distrujañ ar broadoù en Europa dre vreinadur o sevenadurezh. Erziwezh, o komz dizamant, e c'hellfed lavarout ez eo Poutin ur chigarder¹⁵ evit ar vedelourion, hag en ur pennad war brezel Ukraina, sinet gant Chuck

¹² Lankad : *étape, phase d'une évolution*

¹³ Gronnveliour : *oligarque*.

¹⁴ Herouezañ : *promouvoir*.

¹⁵ Chigarder : *embêteur, emmerdeur*.

Baldwin, den politikel amerikan, war al lec'hienn *La Cause du Peuple*, e kaver prederiadenn ar C'helenner Stephen Cohen : “*E diaz follezhioù Washington e veze kavet ar mennozh, kaset war-raok ivez gant ar prezidant Obama hag hervez doare strewet bepred e kreiz ar C'huntell amerikan ma c'helle ha ma ranke Rusia bezañ “digenvezet” en aferioù ar bed*”. En hevelep pennad e vez meneget un addispleg dispar gant Ron Paul war an AFNA : “*Pa voe kemennet gant an amaezhiadurezh Bush e 2008 e vije bet Ukraina ha Georgia dilennadus da emezeladur en AFNA, e ouien e oa ur mennozh fall-kenañ. Tost daou zekvloaveziad war-lerc'h dibenn Emglev Varsovia hag ar Brezel Yen, n'he doa ster ebet ledanidigezh an AFNA. An AFNA e-unan n'en doa ster ebet*”.

O tisplegañ e vouezhiadenn “nann” war an danvez lezenn evit darbenn an astennadur en doa lavaret : “*Bez' ez eo an AFNA un aozadur a oa deuet diwezh e bal gant diwezh e enebour, Emglev Varsovia. Ar c'helc'hiad astennadur a-vremañ eus an AFNA a zo ur gopr politikel evit gouarnamantoù Georgia hag Ukraina a zo degouezhet d'ar galloud da heul dispac'hoù skoazellet gant ar Stadoù-Unanet, an tebet Dispac'h Orañjez ha Dispac'h Rozenn*”.

Brec'h armet *Urzh Nevez ar Bed* e hañval bezañ deuet an AFNA, hag e ginnig astennadur da Ukraina evel un antell stignet da Vladimir Putin, evel muleta an torero dirak an tary, ha ma 'z eo kouezhet enni. Un antell all a c'hallfe bezañ stignet dizehan, goulennet he deus Sweden, neptuek betek-henn, mont e-barzh an AFNA, hag ar Finland he deus 1300 km harzoù gant Rusia a c'hallfe goulenn ivez.

Spurmant an naonegezh war an dremmwel

Diskuliet eo bet un dra dic'hortoz er meziennoù : bez' e c'hellfe ar brezel en Ukraina delankañ un naonegezh en holl vroioù arabat hag afrikat : e 2019 ar Maroko a lakae da zont diouzh Ukraina 30 % eus e vevezerezh gwinizh, Tunizia 52 %, Egipt 69 %, Siria 24 %... E dalc'h Rusia eo Aljeria hag ar broioù afrikat evit muioc'h eget 30 % evit o enporzhiadur gwinizh ha gant broioù 'zo evel ar Benin ez eo tost da 100 %. Er broioù-se ez eo chomet ar bara ar magadur diazez, e-keit ha m'hon eus un tamm bara da zebriñ, omp sur da chomp hep mervel gant an naon. Anavezet em eus an dra-se,

peogwir on bet ganet en un atant-tiekaat : daou damm bara amanenn er sac'h-skol gant un tamm chokolad pe un aval pe zaou a oa merenn pep skoliad war ar maez e Breizh tro-dro 1950. Bremañ ne vez ket debret ken a vara e Breizh hag en Europa a-bezh d'am soñj. Debriñ bara a ra d'an dud tevaat a vez klevet, hogen n'eo ket heñvel er broioù-se e-lec'h m'eo niverus ar boblañs paour. Arabat deomp ankounac'haat kabaduilhoù an naon e 2008 e Tunizia, en Egipt... ; gouarnamantoù a voe diskaret.

Kentañ broioù eziporzhier gwinizh ha greun tro-heol ha kolza eo Ukraina ha Rusia. Digresket e vo Eostad ar gwinizh en Ukraina en abeg ma ne vo ket graet al louzaouadurioù an nevezamzer war ar gwinizh nag hadet tro-heol pe kolza : galvet eo bet an holl baotred d'an emgann e-enep ar Rusianed. Mar c'hoarvezfe d'ar merc'hed pe d'an tadoù-kozh klask amsaviñ ar baotred kaset d'an emgann, evel ma 'z eo c'hoarvezet e Breizh, hag en Europa a-bezh e-pad an daou brezel-bed, n'eo ket sur e c'hellfe bezañ hiziv, rak e 1914 ha 1940 e oa dreist-holl atantoù bihan e Breizh, atantoù-tiekaat, e-lec'h ma oa an nerzh-keflusk ur marc'h pe ur sterniad-oc'hen, ma oa ar c'houeriadezed breizhat a-wechall gouest d'o bleinañ. En Ukraina e tle bezañ disheñvel bras an traoù, atantoù bras ez eus, divent zoken, heritour eus ar c'holc'hozioù soviedel e-lec'h ma vez graet al labour gant ardivinkoù gounezet kemplezh a-walc'h. Forzh penaos e vanko an trelosk¹⁶ evit lakaat da dreiñ kefluskerioù an ardivinkoù-se, miret ma vo al liñvenn brizius-se, da gentañ-penn, evit an arme.

Un dra a c'hellfe c'hoarvezout ha n'eo ket bet kemeret e kont betek-henn, a zo ar riskl da welout luskad an dreuztiriaded war-zu Europa o kreskiñ, o tiriilhañ a-vil-vern, en abeg d'an naon en o broioù, neuze, e-lec'h da vroioù an Unaniezh Europa ha d'ar Stadoù-Unanet kas armoù a bep seurt d'an Ukrainiz, goulennet dizehan gant o prezidant Zelenski, e vefe gwelloc'h kuzuliañ dezhañ mont da azezañ ouzh an daol kevraouiñ¹⁷ gant Vladimir Putin, hogen ne hañval ket bezañ ar pal klasket gantañ, na gant an Amerikaned, na gant an Europiz, ha keit ha ma vo Ukrainiz oc'h asantiñ da ober kig brezel, perak kemer diaez ?

Donwal Gwenvenez

¹⁶ Trelosk : *le carburant*.

¹⁷ Kevraouiñ : *négocié*.

Atersadenn Mazhev Vannier, den-a-Iliz yaouank

Gallout a rafes en em ginnig ? (Anv, orin, micher, darempred ouzh ar brezhoneg)

Mazhev eo ma anv, me zo bet ganet e Gwened, ha kresket em eus e Plarnel (e-kichen ragenez Kiberen). Urzhiaet e vin beleg a-benn daou viz, e Keranna, goude nav bloavezh a stummadur er c'hloerdi hag er barrez. Kroget em boa da zeskiñ brezhoneg pemp bloaz 'zo gant an hentenn *Assimil*, hag en ur sellout ouzh *Brezhoweb* e-pad an ehanou a-hed ma studioù. Graet em eus daou staj dre soubidigezh evit pleustrañ war ar yezh. Ar bloaz war-lerc'h, savet hon eus ur c'hamp marc'houarn kristen e brezhoneg penn da benn, gant ur skipailh yaouank ha leun a startijenn. Ar pal a oa kinnig vakañsoù fentus ha speredel d'ar yaouankiz vrezhonek. Un abeg mat a oa ivez evidomp da genderc'hel gant ar yezh, dreist-holl e-pad ar vakañsoù. Ar c'hamp a oa mat kenañ, hag ar vugale a oa holl entanet o tistreiñ d'ar gêr. Mennet eo pep hini gwitibunan d'ober ar c'hamp en-dro ar bloaz a zeu. Laouen on da genderc'hel gant ar brezhoneg evit kinnig an aviel d'ar vrezhonegerion en o yezh, en ur lidañ, dizale, an oferennoù hag ar sakramantoù e brezhoneg hag en ur ginnig traoù liesseurt evit gwellaat an darempred gant Doue.

Perak az peus desket hor yezh hag e rez ganti bremañ ?

Pa oan pevarzek bloaz, galvet on bet gant an Aotrou Doue, dre un hunvre, evit mont war e heul war hent ar santelezh, e Breizh gant ar Vretoned en ur ambrougañ anezho. Hag en ur verzout ar galv-mañ em fedenn ha gant ur manac'h eus Kergonan e-pad pevar bloavezh, komprenet em eus a-hed an amzer, Doue a c'halv ac'hanon da zont da vezañ beleg e brezhoneg. Setu perak am eus choazet deskiñ brezhoneg a-hed ma studioù er c'hloerdi evit dont da vezañ gouest da embann ar feiz e brezhoneg, en ur gemer ma flas e-barzh ambrougadeg labourerion an aviel e Breizh.

Penaos e kavez emzalc'h ar Vretoned a-orin ouzh o hennadelezh ?

En ur stad trist int hiziv. An darn vrasañ eus ar Vretoned ne dennont ket gounid eus teñzor divent ar sevenadur evit sevel ur bobl yaouank, lorc'h en he orin hag en hec'h istor. D'am soñj eo pouezus kenañ diskouez d'ar bed, dreist-holl da Vro-C'hall, pinvidigezh ar glad breizhek hag e hengounioù resis. Fae ganin gwelout ur rannvro c'hall evel ar re all gant krampouezhioù ha dañsadoù fentus evit an douristed.

Breizh n'eo ket ur mirdi evit an douristed. Memes tra gant ar feiz er C'hrist ! Ar C'hrist n'eo ket un den mat tremenet, hag an Iliz n'eo ket ur savadur brav evit ar sonadegoù !

Ar Feiz hag ar sevenadur e Breizh a zo liammet dre liamm ar gwad. Ar bobl vreton en deus kresket e-pad kantvedoù gant ar feiz kristen. Ar gristenion vreton o deus pinvidikaet ivez an Iliz gant hengounioù dibar. An daou o deus kresket asambles, hag an daou a dlee en em harpañ an eil ouzh egile evit kenderc'hel da sklerijennañ buhez ar Vretoned, ha gwellaat anezhi.

Pouezus eo evit ur bobl kaout ur relijion, ur gredenn ?

Ma z'eo ret evit an den kemer preder ouzh e spered, na pegen retoc'h eo evit ur bobl. Ar vuhez kevredigezhel a dle diorren an den, peogwir n'eo ket bet graet an den evit bevañ e-unan. Setu perak eo ret evit ar gevredigezh, ober war-dro kreskadur korvigell ha speredel an denelezh. Neuze, ar gevredigezh a zo sañset sikour an dud da vezañ dieub da greskiñ mat gant c'horf hag ur spered unanet.

Ar feiz kristen e Breizh a zo bet ivez ul liamm pouezus etre ar Vretoned. An eskibion o deus labourerion kalz evit unaniñ Breizh da vezañ kreñv e-tal ar broioù all. Hiziv e Breizh, hêrezh ar sevenadur a zo, dreist-holl, douget gant ar glad kristen. Penaos treuzkas an hêrezh-se hep komz eus ar feiz ?

Petra eo perzhioù mat ha fall ar gevredigezh kempred hervezout ?

Ar gevredigezh kempred a zo liammet en he diabarzh gant ar rouedadoù kevredigezhel. Ar fed-se a c’hall bezañ ur skoazell greñv evit embann ar sevenadur ha treuzkas hêrezh ur bobl. Ar yaouankiz a implij mat anezho evit skignañ pinvidigezhioù hor glad.

Met an traoù-se a zo ivez en amboaz da grouiñ ur gevredigezh hollvedel en ur ziwriziennañ an dud eus o douar. D’am soñj, n’eus ket a sevenadur hollvedel. Ni zo holl tud eus ar bed met gant istorioù disheñvel ha doareoù da vevañ disheñvel. Ur binvidigezh eo evit ober anaoudegezh ha mont e darempred gant an dud. Ur sevenadur hollvedel ne skoazello ket an dud da vevañ er peoc’h kenetrezo, er c’hontrol ; ezhomm hon eus da greskiñ en un douar resis evit bezañ e stad da gevrennañ ar frouezhioù anezhi.

Soñjal a ra dit ez eus ur politikerezh breton e Breizh pe n’eus ket ?

Unan a dlefe bezañ evit pleustrañ hon hennadelezh, met hiziv ne welan ket kalz anezhi. Marteze n’anavezan ket a-walc’h kement tra a zo graet evit ar politikerezh e Breizh.

Petra ha penaos e rafes-te ma vefes Penntiern ar Vretoned ?

Pegen diaes eo ar goulenn-se ! Izel e vefen dirak ar c’hefridi-se. Kregiñ a rafen da ouestlañ Breizh da galon Sakr an Aotrou Krist ha da galon dinamm ar Werc’hez Vari, evit bezañ sur e vo oberenn Doue a vo graet ha neket ma hini. Klask a rafen bleinañ, diouzh ma gwellañ, ar bobl vreton betek Rouantelezh an Neñv. N’am eus ket pal all ebet.

Komzoù dastumet gant
Tepod Mab Kerlevenez

Istor Breizh - Levrenn 4 - Barthélémy Pocquet - pajenn 82 da 85

Drouklazh Klison gant Pêr Kraoñ

Ar brezel-se a hañval echuiñ amañ eta, dre an arvell iskis-se, ken hiraet hag a vanke arguzennoù dezhañ.

Er c’hontrol, amañ e teraou eil lodenn an drajedienn. An hini gentañ a oa bet digoret gant fetepañs kastell an Ermin e Gwened ; an eil a zeraou gant drouklazh ru Santez-Katell e Pariz e 1392, daou walldaol renet a-enep d’an hevelep den : Klison.

Ar striv evit lazhañ Klison, graet gant Pêr Kraoñ en noz etre an 13 hag ar 14 Mezheven 1392, a zo kontet gant kalz buhez ha munudoù dic’hortoz gant ar c’hronikour Froissart, a oa e Pariz er mare-se hag a reas un enklask a-zevri a-zivout an darvoud, evel ur c’hazetenner mat hiziv-an-deiz. – Ar pezh n’eo ket ken anavezet-se, ar pezh a zo kalz displannoc’h, ez eo kaoz an torfed, abeg kasoni Pêr Kraoñ da lazhañ ar c’honestabl.

Pêr Kraoñ a oa un aotrou forzh pinvidik, yaouank, ha ne biaoue ket baronelezh Kraoñ,

hogen an aotrouniezhoù ken pouezus all a Sablez hag a Fertez-Bernez. Nebeut amzer a-raok an torfed, e oa bet lodek e tiad breur yaouaer Charlez VI, Loeiz Bro-C’hall yaouank ha skedus, anvet er grez-se dug Touren hag anavezetoc’h en istor dindan an titl dug Orleañs a roimp-ni dezhañ amañ. – Pêr Kraoñ ne oa ket hepken unan eus tudjentil dug Orleañs, e hini muiañ-karet e oa, a anaveze e sekredoù, e blijadurioù. Koll a reas trumm ar plas-se koulskoude, argaset e voe diouzh lez ha ti dug Touren pe Orleañs, evit bezañ lavaret da wreg ar priñs-se, Valentina eus Milano ken koant, un itrik galant eus he gwaz. Pêr Kraoñ, o krediñ e oa abalamour da Glison, a vagas en e enep ur gasoni ferv : abeg e arnod d’e lazhañ. Perak avat mallozhiñ Klison, na vez ket emellet en afer-se na gant Froissart, ken anaouedek eus an darvoudoù, na gant kronikour all ebet ? Amañ e tleer sklêrijennañ, rak amañ emañ an dalc’h, ar pezh a lavaro deomp hag un hanezenn e oa an torfed-se, pe kentoc’h un istor a-bouez er stourm gant Yann IV a-enep ar c’honestabl.

Pêr Kraoñ, en e yaouankiz kentañ, a-raok bezañ stag ouzh dug Touren, en doa servijet

ur priñs all a Vro-C'hall, ul Loeiz Bro-C'hall all, dug Anjev ha breur Charlez V, a voe galvet e 1380 gant tron Napl dre destamant ar rouanez Janed I^{añ}, hag a dremenas en Italia e 1382 da gemer an tron-se. Eno e chomas daou vloavezh hep dont a-benn d'e embregadenn ; an arme en doa renet a welas mont da netra gant ar c'hleñved, an dienez, hag eñ e-unan a varvas paour, truezus, en ur vourc'h vihan (Biseglia) amezek da Vari d'an 21 Gwengolo 1384, endra c'hortoze a-benn adsevel e fortun sikourioù arc'hant en doa kaset da glask e Bro-C'hall gant unan eus e vevelien, ha ne errujont biskoazh.

Ar mevel karget gant ar gefridi uhelañ-se e oa Pêr Kraoñ : resevet en doa e Bro-C'hall sammadoù bras, roet dezhañ gant dugez Anjev evit o dougen d'he gwaz. Kraoñ a oa skañv ha mignon d'ar blijadurezh, ha pa zistroas da Italia, e-lec'h mont war-eeun da Napl, e tremenas dre Venezia, e tispignas er festoù, en ebatoù, un darn vras eus teñzor e vestr, ha peogwir e oa c'hoazh eno pa varvas Loeiz Anjev, e teuas en-dro e Bro-C'hall gant ar peb all. Kalz a dud el lez a lavare e oa ul laer divergont ; dug Berri, breur dug Anjev, a lavaras dezhañ un deiz : « Te eo, treitour drouk, a zo kaoz da varv ma breur ! » Olier Klison a dlee bezañ unan eus ar re daerañ da salmenniñ Pêr Kraoñ war an divout-se ; rak dugez Anjev, intañvez ar c'haezh marvet e Bari, a oa priñsez Mari merc'h da Charlez Bleaz, c'hoar da Yann kont Pentevr, ha gwelet hon eus pegen stag dre gengarantez ha dre c'hounidoù e oa Klison ouzh an tiegezh a Bentevr.

En desped da-se, henn adlavarout a ran, kronikour ebet, test kempred ebet ne ziskouez dorn Klison en taol a gasas Pêr Kraoñ diouzh ti dug Touren. – Pelec'h e c'hellas Kraoñ kemer ar menoz-se eta ? Ne chom ket martezead hepken deomp. Froissart a reas un enklask pizh war an darvoud-se, ha lavarout a ra, hep termal, ar pezh a veze lavaret gant pep hini en e amzer, na oa ket gwirvoudel hepken hogen diogel.

Pêr Kraoñ en doa da vamm Marc'harid Flandrez, kenitervez Janed Flandrez kontez Moñforzh mamm da Yann IV ; dre-se e voe evel ur c'henderv d'hon dug. Ha pa voe

argaset diouzh ti dug Touren, e teuas kerkent e Breizh da zougen klemm, ha hervez Froissart, e lavaras Yann IV dezhañ timat : « Kenderv kaer, bezit seder, Klison eo a zo kaoz a-gement-se. » Hag ivez, a ouzhpenn ar c'hronikour, « alies e komzent a-gevret a-zivour an aotrou Olier Klison, penaos ha dre be zoare e lakajent anezhañ da vervel. Ha klemm a rae alies dug Breizh dre ma n'en doa ket e lazhet pa oa dalc'het gantañ e kastell an Ermin. »

Setu eta lakaet sklaer, istor, orin gwalldaol Pêr Kraoñ, lodenn a-bouez, a weler, e stourm Yann IV a-enep Klison, – ha bremañ setu penaos e c'hoarvezas.

Pêr Kraoñ en doa e Pariz, el lec'h ma voe abaoe bered Sant-Yann, ul leti bras, miret pa oa ezvezant gant ur porzhier. War-dro Koraiz ar bloaz 1392 e c'houbrene Kraoñ, er broviñs, un niver bennak a lakepoded, gwazed o mil micher a gase da Bariz da borzhier e leti. Hennezh a ranke o gwiskañ, o armañ, o herberc'heriañ, o diwall aketus el lojeiz hep o diskouez, da c'hortoz donedigezh ar mestr.

P'en doe bodet un daou-ugent bennak evel-se e teuas da Bariz. Krog e oa an hañv. Hepdale e ouezas penaos, da bardaez Yaou Gouel-Doue, a oa d'an 13 Mezheven, e oa ar roue e soñj d'aozañ el leti Sant-Paol ur fest hag a badfe diwezhat a-walc'h en noz, e-lec'h ma teufe ar c'honestabl. Gant-se e reas Kraoñ e steuñv. En noz etre an 13 hag ar 14 Mezheven, war-dro kreiznoz, gant e zaou-ugent lakepod war varc'h, en em bost en ur c'hroashent eus ru Santez-Katell ma ranke Klison tremen a-benn distreiñ d'e leti a oa e ru ar baradoz.

Un tamm goude un eur mintin e tegouezhas Klison gant eizh den dezhañ, war varc'h ivez, o tougen flammerennoù, dizarm avat. Pa errujont tost ouzh o enebourien, bandenn Pêr Kraoñ o tont eus ar ru amezek a zaoulamm war amheuliadeg ar c'honestabl hag a lazh da gentañ o flammerennoù. Klison a gredas e oa ur farsadenn a-berzh dug Touren, a blije kalz dezhañ oberiañ evel-se, ha laouen e krias :

– « Feiz, aotrou, graet fall eo. Met pardonñ a ran deoc’h, dre ma ‘z oc’h yaouank, pep tra eo c’hoari ha fent evidoc’h. »

An touell-se avat a steuz buan. Kraoñ a zic’houhin e gleze gant ur youc’h yen sklasklas :

– « D’ar marv ! D’ar marv, Klison ! Ret deoc’h mervel amañ !

– Piv out-te a lavar hevelep komzoù ? a respontas Klison.

– Me zo Pêr Kraoñ, hoc’h enebour. Ken alies ho peus brouezet ac’hanon ma rankit paeañ bremañ. War-raok ! a youc’h-eñ d’e baotred ; amañ ganin an hini a c’houlennan, hag a vennan kaout. »

Tud ar c’honestabl, dizarm, ne oant ket evit e zifenn, ken e steuziont. Pep taol a zegouezh war Klison, hag eñ e-unan gant ur gougleze daou droatad hirder hepken a rae gantañ diouzh e seizh gwellañ ; kadarn en em zifenne. Gwir eo ne oa ket bet lavaret d’an daou-ugent gwaz piv a vefe o enebour, ha pa glevjont anv ar c’honestabl, e kemerjont aon ; skeiñ a rejont « paour, » eme Froissart, hag o zaolioù ne oant ket galloudek peurliesañ. Klison a dapas war e benn, erziwezh, un taol kleze roet taer dezhañ, ma kouezhas diwar varc’h. Ar gouezhadenn-se dlee bezañ bet e varvidigezh a voe e salvidigezh.

E-lec’h-se e ru Santez-Katell e loje ur baraer. Pa grogas ar gannadeg e oa o paouez sevel da verat e doaz ha poazhañ bara an antronoz. O klevout ar safar war ar straed e voe kounnaret, damzigeriñ a reas e zor da welout petra a oa kaoz. Klison o kouezhañ diwar e varc’h a stokas ouzh an nor gant e gein, o vountañ ar baraer en diabarzh hag eñ e-unan penn da benn e-barzh ar stal. Re izel ha re strizh e oa an nor da lezel un den war varc’h da dremen ; ivez, al lakepoded a lakajont troad d’an douar evit mont da reiñ taol ar marv da Glison, seul vui ma teue gouleier kentañ tarzh-an-deiz war-wel. Krediñ a raent e oa graet an afer. Pêr Kraoñ a lavaras d’e baotred :

– « Ac’hanta, ac’hanta, a-walc’h hon eus graet ; ma n’eo ket marv, e varvo abalamour

d’an taol war e benn, skoet outañ gant ur vrec’h kadarn. »

Hag ar vandenn a-bezh, o vountañ o mirc’hed da c’haloupat, az eas kuit dre zor Sant-Anton, rak digor e chome dorioù Pariz abaoe reveulzi ar *Maillotins* (1382).

Lakaet diaes e voe ar baraer gant un hevelep den en e di, en ur stad ken fall. Hepdale e teuas en-dro gwazed ar c’honestabl war lec’h an emgann da welout o mestr, hag o vezañ e gavet aze e prederjont anezhañ diouzh o gwellañ.

Keloù an torfed a nijas kerkent davet ar roue, e leti Sant-Paol. Charlez VI a lammas diwar e wele, a gemeras e arc’henoù, un hopelan war e roched, a redas e ti ar baraer, ma voe e gomzoù kentañ :

– « Konestabl, penaos en em santit ?

– Aotrou ker, blin ha gwan.

Mezeien ar roue avat, goulennet gantañ mall warnañ, goude bezañ sellet ouzh e c’houlioù, a welas ne oa marvus nikun anezho, o prometiñ adlakaat Klison war droad, pe kentoc’h war varc’h, a-benn ur pemzektez.

Ar roue a zisklêrias neuze d’ar c’honestabl e vezo paeet ker ha kastizet ken ker all an torfed-se. Ar c’honestabl a drugarekaas ar roue eus e « weladenn vat, » hag ar priñs a zistroas da leti Sant-Paol.



Skoed Olier Klison.

Priz an aour kresket abaoe deroù ar brezel en Ukraina. Hep souezhañ kalz hon eus heuliet ha gwelet priz an oñs aour o sevel trumm a-benn an deiz kentañ war-lerc'h tagadenn Rusia ouzh Ukraina. Kalz posterien, hep mar ebet, met tud voutin ivez, o deus kemeret aon hag o deus lammet war ar c'hontoueroù pe al lec'hiennoù internet arbennik aour hag arc'hant da lakaat o espern un ur goudor gwelloc'h eget ur gont bank. Evel-se, priz an oñs hag a droe war-dro 1600€ e deroù miz C'hwevrer, ar pezh a oa uhel-mat endeo, en deus savet trumm da 1700€ an deiz war-lerc'h deroù ar brezel, ha pignet betek 1880€ d'an 8 a viz Meurzh, ar pezh a zo ur rekord bedel dibar en istor red an aour. Hiziv eo digresket un tammig, met derc'hel a ra da dreiñ en-dro da 1750€ an oñs. Daoust hag ur mare mat eo evit prenañ eta ? Techet omp da lavarout n'eo ket, gwell e vefe gortoz e sioulfe ar brezel en Ukraina hag e tiskennfe ar prizioù, met daoust ha ne c'hellfe ket mont war uhelaat muioc'h c'hoazh en dazont ? Deoc'h-c'hwi eo d'ober ho soñj.

Marv Yvan Colonna. Ar broadelour korsat brudet, kondaonet d'an toull-bac'h da viken evit bezañ lazhet ar prefed gall Claude Erignac e C'hwevrer 1998, a zo marvet d'an 21 a viz Meurzh e Marseilh. Trouz a zo bet en-dro d'e varvidigezh er skingomz e-pad ur mizvezh koulz lavarout. Da gentañ, pa oa bet taget en e doull-bac'h gant ur prizoniad all, ur C'hamerounad hag islamour dirollet, hag a lakaas ar broadelour etre ar vuhez hag ar marv. Ar vroadelourien yaouank e Korsika, o klevout ar c'heloù, o deus savet reuz war an enez kreizdouarek, o vanifestiñ taer, diouzh an deiz hag an noz, o c'houlenn groñs e vefe degaset o haroz er vro. Taget e oa bet e sal sport ar prizon d'an 2 Meurzh. Kaset e voe da glañvdi Marseilh e-lec'h ma varvas da heul e dagadenn 19 devezh diwezhatoc'h. Ar reuz kaset e Korsika gant ar vroadelourien, kirritan tangwallet, poliserien gwallgaset, o deus lakaet an teodoù da vont adarre diwar-benn ur stad a emrenerezh evit an enez vihan. Mouezh aotreet ar stad c'hall e-unan, Gabriel Attal, en deus graet anv eus emrenerezh. Tost 62 vloaz e oa Yvan Colonna, ha tud e bobl a zalc'ho

soñj anezhañ pellamzer. E vamm a oa ur Vretonez anvet Cécile Riou. E dad a oa ur c'hannad korsat sokialour, roet dezhañ al Legion a Enor en Ebrel 1998.

Hungaria. An dilennadegoù broadel en Hungaria a zo c'hoarvezet d'an 10 a viz Meurzh evit an dilennadeg prezidantel, a-benn dilenn ar prezidant nevez, ha d'an 3 a viz Ebrel evit an dilennadeg-lezenniñ, a-benn dilenn ar maodiern kentañ ha kannaded o dael. Ar strollad politikel Fidesz, eus an tukleiz er bloavezhioù 1990 ha bremañ gwelet evel poblelour ha broadelour, eo a zo bet trec'h en dilennadegoù. Ar maodiern kentañ, brudet, Victor Orbán, a zo bet addilennet evit ren an aferioù e-pad ar pevar bloavezh da zont gant 54,01 % eus ar mouezhioù. 135 sez diwar 199 a zo en dael a zo bet gounezet ivez gant kannaded eus ar Fidesz. Un trec'h bras awalc'h eta. Ar prezidant nevez, a zo ur brezidantez, Katalin Novák, a gemero he c'harg d'an 10 a viz Mae. Dilennet eo bet hi gant 72,87 % eus ar mouezhioù. Mat eo gouzout en deus ar prezidant en Hungaria kalz nebeutoc'h a c'halloudoù avat eget ar maodiern kentañ. Ar politikerezh en Hungaria n'emañ ket o vont da cheñch eta, rak ar prezidant kozh, János Ader, a oa tost ouzh mennozhioù Victor Orbán end-eeun.

Skandal McKinsey and Compagny. Un enklask a zo bet digoret d'an 31 Meurzh e lezvarn Pariz diwar-benn an implij graet gant Emmanuel Macron, e-pad e bempbloaziad, eus kabinedoù kuzulioù. Meur a gabined a vije bet paeet gant arc'hant foran ar stad c'hall evit reiñ kuzulioù da Emmanuel Macron. Meur a gudenn a sav diwar ar gobidell-se : 1° Diskouez a ra ne oa ket gouest Macron da ouarnañ e vro e-unan. 2° Dispignet e vije bet etre 500 ha 750 milion a euroioù a arc'hant foran evit ar c'habined amerikan McKinsey pergen, met kabinedoù all a zo bet. 3° Ar c'habinedoù-se, estren a-wechoù, o deus levezonet kreñv ar politikerezh e Bro-C'hall oc'h ober dezhañ na vezañ mui gall kement-se. 4° McKinsey, ur gompagnunezh dezhi stalioù e Bro-C'hall (Pariz ha Lion), n'he deus paeet tell na taos ebet war ar milionoù a

c'hounid graet ganti. Ur c'heloù mat e oa evit eneberien Macron, met ret eo krediñ ne vefe ket bet direnket kelo-se un darn vras eus poblañs Bro-C'hall, pa weler disoc'h an dilennadeg prezidantel.

Rouantelezh-Unanet. Ar rouanez Elizabeth II he deus lidet diriaou 21 Ebrel he 96 bloaz. Ar bloaz-mañ n'eo ket bet aozet lid foran ebet, nemet taolioù kanol zo bet tennet e Londrez dirak an Tower Bridge, met ar rouanez, kozh ha sur a-walc'h un tammig skuizh, he deus divizet lidañ he deiz-ha-bloaz gant he ziegezh en un doare prevez. E Mezheven eus ar bloaz-mañ e lido he 70 bloavezh a ren evel rouanez ar Rouantelezh-Unanet. An hini he deus renet ar muiañ en istor ar vro-se eo.

An dalibaned en Afghanistan. Eizh miz goude o zrec'h war ar vro, deuet a-drugarez da gimiad an Amerikaned dreist-holl, emañ an Dalibaned o ouarnañ ar vro hervez o giz islamek-rik. Ur ministrerezh a-bouez evito a zo bet krouet : Herouezadur ar vertuz ha Dizarbenn ar si. Gwazourien a vez o foetañ ar straedoù hag ar marc'hadoù foran o reiñ kentelioù hag alioù d'an dud, evel na selaou sonerezh, na evañ alkool, lavarout d'ar baotred lezel o barv da greskiñ, derc'hel ar maouezed ar gêr ar muiañ, pe ober dezho mont er-maez gant un *hidjab* (lien o c'holeiñ ar penn hag ar c'horf). Desket o deus an dalibaned abaoe ar mare ma oant bet o ren ar vro etre 1996 ha 2001. Bremañ ne skoont ket mui an dud war ar straed, evit poent.

Brezhoneg e kuzul rannvro Breizh. Disklêriet en deus prezidant rannvro Breizh Loïg Chesnais-Girard d'ar 6 Ebrel 2022 e c'hallor hiviziken komz e brezhoneg end-eeun e-pad dalc'hoù ar c'huzul rannvroel, ha troet e vo war-eeun ar c'homzer. Ouzhpennet en deus : « *Gant kevatalded ha denezh e ranker mont ouzh ar sujed-se. Seul vuioc'h e klevor ar yezhoù rannvroel, seul aesoc'h e vo. Ni zo keodedourien vreton, gall hag europat* ». Ne chom nemet dilenn brezhonegerien er rannvro eta, rak n'eus ket kalz anezho evit c'hoazh.

Distro Kan ar Bobl. Disul 3 Ebrel e oa c'hoarvezet gourfenn ar c'hampionad brudet Kan ar Bobl e Pondivi, e palez ar

C'hendalc'hoù. Un distro gortozet e oa, pa voe nullet e 2020 abalamour d'ar c'hovid-19 hag e 2021 e oa bet dre video hepken. Wardro 400 skoliad a oa en em gavet kêr vras norzh bro Wened, bugale eus ar c'hlasoù brezhonek dreist-holl. Leun e oa ar salioù evit selaou ouzh ar ganerien yaouank, gent kerent, mignoned ha tiegezh. Meur a briz a oa da c'hounit. Evit ar skolioù, kelc'hiad unan, eo aet gant ar maout gant Skol Georges Brassens eus Ploveren. Skolioù kelc'hiad 2 : Skol Jules Vernes, Plouarzhmael. Skolioù holl liveoù : skol diwan Louanneg. Solo : Brewen Ar Gwell. Daouad : Ar Breton/Bobinet. Strollad : Makadam Fentus. Kontadennoù : Mikael Simon. Kan ambrouget : Miss Ninnog. Kan da zañsal : Simon Kreac'h-Kadeg – Gwenole Korneg. Gourc'hemennoù d'an drec'hourien, kozh pe yaouank !

Donedigezh ar robodoù e Breizh. E Kemper ez eus ur predti sinaat bras, anvet an Erer Roueel, hag a implij ur robod hiviziken evit servijout ar pratikoù. E anv zo R2-D1 hag ur penn kazh a zo dezhañ. Talvezout a ra da servijout an evadurioù d'an dud, ha mont a ra e-unan eus ar c'hontouer d'an taolioù. Laouen eo rener ar predti, Jean-Pierre Xu, daoust m'en deus koustet 11 000€ ar robod e sikour kalz an daouzek implijad a zo en e bredti, evit doare. Amañ e vefe an dazont hervez doare : robodoù ha Sinaiz e Breizh.

Gouelioù Pask. Dasorc'het eo an Aotrou Krist, d'an trede deiz goude e varvidigezh. Adsavet eo eus marv da vev o prouiñ ez eo gwir vab da Zoue. Lidoù liesseurt a zo bet aozet e Breizh dre an abeg-se ar bloaz-mañ. Gwelet eo bet da skouer, d'ar 15 Ebrel e Pondivi, un hent ar groaz c'hoariet gant aktourien o tiskouez Jezuz o kerzhout gant poan, o tougen e groaz war e skoaz, ambrouget gant soudarded roman, hag eñ o vont davet e donkadur ha bezañ kroazstaget goude. An darvoud biblek-se en deus desachet kalz parreziz e kreiz kêr Pondivi, dindan un heol kaer ha tomm.

Kentelioù brezhoneg digoust war internet. Chadenn *YouTube* Tepod Mab Kerlevenez a ginnig kentelioù brezhoneg abaoe diwezh miz Genver, dindan stumm videoioù berr, etre ur vunutenn hanter ha peder munutenn d'ar

muiañ, evit deraouidi war ar brezhoneg. M'ho peus mignoned o teskiñ ar yezh, pe ma anavezit tud, e c'helloc'h ober brud d'ar videoioù-se outo. Berzh a ra ar brezhoneg war internet, war al lec'hienn *YouTube* peurgetket,

met ivez war *Instagram*, gant un toullad mat a Vretoned yaouank entanet o kinnig klipoù berr a bep seurt evit kregiñ e-barzh. Ret-mat eo d'ar brezhoneg bevañ en e amzer, hag implijout an oustilhoù a-vremañ.

Kanaouenn an Niverenn

Kan Palestina

(*Troet diwar «Palästinalied»*)

Gounezet 'm eus ma bri a briz uhel
Gwelet a ran gant ma daoulagad a bec'her
An douarou glan, an douar santel
Pebezh enor eo dont a-benn d'ar vro ger
A holl viskoazh am eus henn hetet
Erruet on d'an douar gortozet
Amañ oa deuet Doue da vezañ enkorfet

Bro gaer, marzhus holl, ha pinvidik-mor
Eus an holl re am eus bet tro da welet
An hini goantañ out-te, e goudor
Ha lavar din pe vurzud a zo c'hoarvezet
Ur Werc'hez o tougen ur bugel
Kelc'hiet e oa gant un arme a ael
Daoust ha n'eo ket kement-se un darvoud
santel ?

Badezet eo bet an Hini glan
Evit ma vo glanaet an denelezh a-bezh
Ha goude-se eo bet gwerzhet buan
Evit ma vimp-ni sklaved dieubet en diwezh
A hent all e vijemp bet kollet
Mallozh deoc'h-c'hwi hag a zo paganed
Gant ar goaf, ar Groaz hag ar spern e veoc'h
flemmet

C'hoantaet en deus dre druez ouzhimp-ni
Mont a-benn d'ur marv yen ha kalet

Peogwir e kare ac'hanomp gant spi
An hini Holle'halloudeg a voe kunujennet
Graet en deus evit hor buhezioù
N'eus ket brasoc'h e-touez ar burzhudoù
Hag hep mar e voe unan eus e wellañ
perzhioù

Eus ar bez ma oa-eñ gourvezet
Ar mab zo savet betek an neñvoù
Da vizviken e chomo-eñ karet
E-kichen an Tad meur kuzulier e vo
Int o-daou ne reont nemet unan
Den ne c'hall disrannañ an daou-mañ
Evel-se oa deuet da Abraham ar wech kentañ

Abaoe m'emañ distro war an douar
Ar Rener en deus stourmet ouzh an diaoul,
dispar
Biskoazh kement all ne oa bet gwelet
Sed perak en em gav ar yuzevien glac'haret
An Aotrou a denn e warez
Neuze, bev, gwelet e vez
Gant e zorn e skoe hag e pile didruez

Ha da c'houde e vane en hor gwlad
E-doug daou ugent devezh-pad
El lec'h ma oa bet kaset gant an Tad
E spered a oar bremañ hon diwall mat
An douar-mañ a zo santelaet
Ha gant Doue anavezet
Gantañ, e anv a zo bet distaget

Mererezh :

23 € eo ar skodenn a ro ar gwir da resev *Ar Gouloù Gwenn*. Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **Ar Gouloù Gwenn** da : Ar Gouloù Gwenn 1 Hent-dall an Hurened 56400 BREC'H

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr, pe dre ar Post da rener Ar Gouloù Gwenn : Yann MIKAEL, 368, straed Chapel Prad-Koulm 29250 PLOUGOULM. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Ar Gouloù Gwenn**, c/o Tepod Mab Kerlevenez – 1 Impasse des Hérons 56400 BREC'H - ISSN : 2677- 5271